

K A I E R O U

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G

K A I E R N° X

Miz Here 1970

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages : 10 F.

C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper).

Ce numéro achève la 1ère série; pensez à renouveler la souscription.

TAOLENN AR HAER n° X - Kala-goañv 1970

SKRITUR ZAKR EN OVERENN hag OREZONOU


	Pajenn
Gouel an Oll Zent	1-5
31-ved Sul Ordinal (1a a viz Du 1970, lamet ablamour d'ar gouel)	6-9
32-ved Sul Ordinal, bloavez B (8 Du 1970)	9-13
33-ved Sul ordinal, d° (15 Du 1970)	14-16
** Ar bedenn goude komunia 'zo p. 20 **	
Gouel an Aotrou Krist Roue	17-20

* * * * *

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 20 a viz Here 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.



GOUEL AN OLL ZENT

Lennadenn Ia..- An abostol sant Yann a zispleg deom, dre
eur weledigez e-neus bet, pegen niveruz eo ar Zent.

PENNAD EUZ LEVR AN DISKULIADUR GAND AN ABOSTOL SANT YANN (7/2-4, 9-14)

2. Setu ar pezh am eus gwelet, me, Yann:
Eun El a oa o sevel d'an neh diouz kostez ar zav-heol,
siell an Doue beo gantañ.
Hopet e-neus a vouez kreñv d'ar pevar El o doa bet galloud
d'ober droug d'an douar ha d'ar mor,
3. hag e lavare: "Na rit ket a zroug d'an douar, na d'ar mor, na d'ar gwez,
kén na vo bet merket ganeom, war o zal, servicherien on Doue."
4. Hag am eus klevet lavared péd a oa bet merket gand ar ziell:
pevar ha seiz-ugent mil (pe: kant pevar ha daou-ugent mil)
daouzeg mil euz peb meuriad bugale Israel.
9. Goudeze am eus gwelet eun engroez vraz a dud,
na helle dén konta péd a oa anezo (pe: péd e oant)
euz kement bro, kement rumm, kement pobl ha kement yéz a zo,
oll en o zav dirag tron Doue ha dirag an Oan,
dillad gwenn ganto, ha skourrou palmez en o daouarn;
10. hag e savent uhel o mouez, da lavared:
"Ar zilvidigez a zo d'on Doue, azezet war an tron, ha d'an Oan ive!"
11. Hag an oll Elez a oa en o zav, tro-dro d'an tron,
en-dro d'ar re goz ha d'ar pevar aneval beo;
eet int da stoui dirag an tron, o fenn d'an douar,
evid adori Doue, en eur lavared:

12. "Amen! Bennoz ha gloar, furnez ha trugarez, enor, galloud ha nerz
d'on Doue da virviken. Amen!"
13. Unan euz ar re goz, neuze, a lavar din:
"Ar re-ze, dillad gwenn ganto,
piou int, hag a beleh int deut?"
14. Ha me da respont: "Va Aotrou, c'hwi eo a oar."
Setu e lavar din en taoñ-mañ:
"Bez' int ar re 'zo o tond euz an drubuill vraz;
gwalhet o deus o dillad, ha gwennet anezo gand gwad an Oan."

SALM 23 / 1-2, 3-4ab, 5-6 - Da ziskan e heller kemer "Baradoz dudiuz"
pe "Jezuz, pegen braz ve".

1. D'an Aotrou Doue eo an douar hag e oll zanvez,
an douar a-bez ha kement a vev ennañ.
2. Eñ e-neus diazezet an douar kaled dreist ar moriou,
hag a zalh anezañ divrall a-uz d'an doureier.
3. Piou a bigno war menez an Aotrou,
ha piou a gavo digemer en e di santel?
4. An den dizroug e zaouarn ha glan e galon,
ha n'eo ket techet da heuil an idolou goullo.
5. Henez a resevo bennoz digand an Aotrou,
ha digoll just digand Doue, e Zalver.
6. Setu ar ouenn dud a glask e zervicha,
a glask servij ar gwir Doue.

*** SALM all, 33/9-11, evel el levr-overenn koz,
gand an diskan: "Eüruz an hini"

** Salm 33/9,10,11 - Diskan "Eüruz an hini", ar poziou war an heveleb ton.

9. Deuit da dañva ha c'hwi 'gompreno
Pegen dous ha mad eo 'n Aotrou Doue.

10. Servichit Doue, oll e dud fidel,
Rag ne vank netra d'e zervicherien.

11. Neb a glask Doue euz e oll galon
Mad ebed dezañ ne raio diouer.

===== * An eil lennadenn, ankoueet amañ,
* a zo e traon ar bajenn 4.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia! Deuit oll d'am haoud, c'hwi a zo er boan
ha pounner ho samm: me ho tivehio. - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (5/112)

1. En amzer-se, o weled pegement a dud a oa, Jezuz a zo pignet ouz tor ar menez;
mond a ra d'azeza, hag e ziskibien a dosta outañ.
2. Kregi a ra (pe: staga 'ra) da gelenn anezo, o lavared kement-mañ:
3. "Eüruz ar re 'zo paour a galon, rag dezo eo rouantelez an neñvou.
4. Eüruz ar re 'zo leun a zouster, rag an douar prometet a hounezint.
5. Eüruz ar re o deus da ouela, rag frealzet e vezint.
6. Eüruz ar re o deus naon ha sehed euz servij Doue,
rag o gwalh a vo roet dezo.
7. Eüruz ar re 'zo trugarezuz, rag d'o zro e kavint trugarez.
8. Eüruz ar re 'zo glan a galon, rag int a welo Doue.
9. Eüruz ar re a labour evid ar peoh, rag anvet e vint bugale da Zoue.
10. Eüruz ar re o deus da houzañv ablamour da zervij Doue,
rag dezo eo rouantelez an neñvou.
11. Eüruz oh-c'hwi pa daolo an dud dismegans warnoh, pa raint brezel deoh,
pa lavarint e gaou beb seurd droug eneb deoh, ablamour din-me:
12. Bezit laouen ha tridit gand ar joa, rag digoll kaer ho peus da gaoud
en neñvou.

KEMPEDENN.- Doue oll-halloudeg ha peurbadel, c'hwi 'ro deom ar joa
d'enori er memez gouel an oll Zent euz ho paradoz;*
ho pedi a reom da skuill seul founnusoh ho trugarez warnom,
ma'z eo niverusoh on alvokaded dirazoh. Dre O.Z.J.K., ho Mab...

WAR AR PROVOU.- Ra blijo deoh, Aotrou Doue, ar provou a ginnigom deoh
en enor d'an oll Zent;*
ni hag a oar, dre ar feiz, emaint e savete er vuez peurbaduz,
grit ma santim anezo oh alvokadi evid or zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

Prefas ar Zent -

GOUDE KOMUNIA.- Setu ar hras a houlennom diganeoh, Aotrou Doue,
en eur adori ho santelez dispar, a sked en ho Sent bodet en-dro deoh:*
ra greskim er zantelez beteg pazenn uhella ar garantez evidoh,
da hortoz tremen euz an daol zantel a zigorit deom er bed-mañ
daved hini ar pred eüruz er baradoz, on gwir vro. Dre J.K., O.Z.

Eil Lennadenn.- Ar Zent, hag ive an oll dud galvet da
vond d'ar baradoz, a zo bugale da Zoue.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (3/1-3)

1. Bugale vian, gwelit 'ta pebez karantez e-neus bet an Tad evidom,
beteg ober ma vefem anvet bugale da Zoue, hag ez om e gwirionez.
An dra-mañ 'zo kaoz ma n'hell ket ar bed gouzoud petra om:
rag ma n'eo ket evid anaoud Doue.
2. Va re muia-karet, bremañ dija ez om bugale da Zoue,
ha n'eo ket c'hoaz diskouezet splann ar pezh a vezim;
an dra-mañ 'ouzom: a-benn neuze, pa vo diskouezet splann,
ni 'vo heñvel outañ, o veza ma welim anezañ evel m'emañ.
3. Kement hini e-neus e Doue an esperans-se,
en em laka glan, evel m'eo glan Mab Doue.

PREFAS NEVEZ AN OLL ZENT (euz ar "Missale Romanum" 1970)

Testenn latin. ... omnipotens aeterne Deus:

Nobis enim hodie civitatem tuam tribuis celebrare,
quae mater nostra est, caelestisque Jerusalem,
ubi fratrum nostrorum jam te in aeternum corona collaudat.

Ad quam peregrini, per fidem accedentes, alacriter festinamus,
congaudentes de Ecclesiae sublimium glorificatione membrorum,
qua simul fragilitati nostrae adjumenta et exempla concedis. Et ideo...

Brezoneg. - ... Doue oll-halloudeg ha peurbadel.

Rag hirio e roit deom ar joa d'ober gouel en enor d'ho kêr zantel,
an Iliz, or mamm, Jeruzalem ar baradoz,

'leh m'emañ dija ar Zent, or breudeur ,
oh ober eur gurunenn en-dro deoh, hag ouz ho meuli da viken.

Etrezeg eno emaom-ni o perhirina gand mall ha gand gred,
heñchet gand ar feiz;

laouen om, er memez amzer, o sonjal er Zent,
izili d'an Iliz evel dom, plaset uhel ganeoh e gloar ar baradoz;
en or gwanded atao o tinerza, e lakit anezo da rei deom
skoazell o fedennou ha skoueriou kaer o buez. SETU PERAG...

Note des KAIEROU. - Comme tous les textes que nous proposons, cette version est faite pour être "parlante" à la simple audition. Il faut rendre les idées fidèlement, mais les exprimer en fonction des destinataires actuels.

Soit l'exemple du début de cette préface: "la cité (de Dieu), qui est notre mère et la Jérusalem céleste". Outre l'ajouté de "ho kêr zantel", on a celui de "an Iliz or mamm", qui reprend une formulation bien connue; et enfin on a "Jeruzalem ar baradoz", au lieu de "an neñv", qui resterait un peu dans les nuages, tandis que "ar baradoz" est vivant et familier.

31e SUL ORDINAL / Bloavez B (1a viz Du 1970)

Lennadenn Ia. - Poueza 'ra ar pennad-mañ war ar gourhemenn

kenta, ken gwir hirio hag en amzer goz: ouspenn kaoud
doujans ha senti outañ, e houlenn Doue or harantez.

PENNAD EUZ LEVR AN ADLEZENN (6/2-6)

2. Moïzez, o komz d'ar bobl, a lavare dezo:
"Doujans az po evid an Aotrou,
ha mired a ri e oll urzioù ha gourhemennou, roet dit ganin,
bemdez a-hed da vuez, hag ez po buez hir,
te, da vugale, ha da vugale vian.
3. Selaou mad a ri, Israel, hag heuil anezo piz,
evid beza eüruz ha dond da greski,
hervez m'e-neus lavaret dit an Aotrou, Doue da dadou,
en eur vro a gaver enni a-founn lêz ha mél.
4. Selaou, Israel: an Aotrou eo on Doue, ha n'eus hini all ebed.
5. Kared a ri an Aotrou, da Zoue, a greiz da galon,
gand da oll ene ha da oll nerz.
6. Ra jomo en da galon ar gourhemenn-mañ, a roan dit hirio.

SALM 17 / 2-3a, 3bc-4, 47,51ab.- Diskan: Eun Doue hebken a adori,
.....Ha dreist peb tra oll a gari.

2. Ho kared a ran, Aotrou Doue: c'hwi 'zo va nerz
- 3a. C'hwi 'zo va roh stard, va hastell ha va divennour.
- 3bc Va Doue, c'hwi ar roh a ro din repu, c'hwi va skoed-brezel,
korn gallouduz d'am zavetei, va zour kreñv.
4. Pedet am eus an Aotrou, meulet ra vezo!
ha saveteet on bet diouz va enebourien.

47. Meuleudi d'an Aotrou! Bennoz dezañ, va roh stard!
Ra vo milmeulet Doue, va Zalver!
51. Eñ a lak e roue da hounid treh dispar,
hag a daol e vadelez war an den sakret gantañ.

Eil Lennadenn.- Eur gentel gaer ha pouezuz diwarbenn
----- Jezuz Krist, or beleg da viken, ar beleg parfet.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (7/23-28)

23. Meur a hini a zo bet beleg dindan al Lezenn goz, an eil war-lerh egile,
rag ar maro a vire outo da badoud.
24. Jezuz, eñ, o veza ma chom beo da virviken,
a zo peurbaduz e velegiaj.
25. Ha dre-ze eo gouest da zavetei evid atao
an dud a dremen drezañ da dostaad ouz Doue,
pa 'z eo beo bepred evid o zikour dre e bedennou.
26. Bez' ez eo, evid gwir, ar Beleg-meur a zigoueze deom kaoud,
santel, dizroug, divlam, dispartiet diouz ar beherien,
hag uhelleet bremañ dreist an neñvou.
27. N'eo ket red dezañ, evel d'ar veleien all, kinnig bemdez sakrifisou
da genta evid e behejou e-unan, ha goudeze evid re ar bobl;
kement-mañ e-neus grêt eur wech hebken,
oh en em ginnig e-unan e sakrifis.
28. Lezenn Moizez a laka da veleg tud leun a zempladurez;
med, war-lerh al lezenn-se, komz Doue, touet gantañ war e le,
a laka da veleg e Vab, rentet peurvad da oll viken.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia!...

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (12/28-34)

28. En amzer-se, unan euz ar skribed a dosta ouz Jezuz, da houlenn outañ:
 "Pehini eo ar henta euz ar gourhemennou?"
29. Respont a ra Jezuz: "An hini kenta eo hemañ:
 Selaou, Israel: an Aotrou eo on Doue, ha n'eus Aotrou all ebed;
30. Kared a ri an Aotrou, da Zoue, a greiz da galon,
 gand da oll ene, da oll spered ha da oll nerz.
31. Hag an eil eo hemañ: Kared a ri da nesa evelldout da-unan.
 N'eus ket brasoh gourhemenn eged ar re-ze."
32. Ar skrib, neuze, a lavar dezañ: "Mad-tre, Mestr!
 Gand gwirionez ho peus lavaret
 ez eus eun Doue hebken, ha n'eus hini ebed nemetañ;
33. Kared anezañ a greiz kalon, gand an oll spered hag an oll nerz,
 ha kared an nesa evelldor an-unan,
 a dalv muioh eged an oll brovou ha sakrifisou."
34. Jezuz, o weled e-neus an den-se grêt eur respont fur, a lavar dezañ:
 "N'emaoh ket pell diouz rouantelez Doue."
 Ha den ebed ne grede mui ober goulennou outañ.

OREZONOU AN 31e SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue... Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez,
 dre ho kras eo e hell ho tud fidel ho servicha ervad;*
 grit deom eta kerzed founnuz, heb koueza morse,
 war an hent a gas d'an eürusted ho peus prometet. Dre O.Z.J.K....

WAR AR PROVOU.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma vo ar zakrifis-mañ
 eur brovadenn divlam evidoh,
 hag evidom eur vammenn a hrasou diwar ho madelez. Dre J.K. or Z.

GOUDE KOMUNIA.- Ni ho ped, Aotrou Doue, da greski ennom
 labour ho kras evid santellaad or buez;*
 maget er zakramant gand ar bara euz an neñv,
 ra vim lakeet muioh-mui e stad da hounid an eürusted
 on eus ennañ ar bromesa hag an tañva.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

=====

32^e SUL ORDINAL / Bloavez B (8 a viz Du 1970)

Lennadenn Ia.- Ma oa Israel gwechall ar bobl dibabet gand
 Doue (evel bremañ pobl ar gristenien), en diavêz d'ar
 bobl-se e oa ivez tud prest da lakad o fizians e Doue
 ha d'ober vad d'o nesa. Evelse e welom amañ eun
 intañvez paour euz kêr Sarepta.

PENNAD EUZ LEVR KENTA AR ROUANED (17/10-16)

10. En amzer-se, pa'z eus sehor braz ha paduz e peb leh,
 ar profed Eliaz a ya en hent etrezeg kêr Sarepta.
 Erruet e-tal dor kêr, e wel eno eun intañvez o keuneuta. (pe: o tastum
 Gervel a ra anezi d'e gaoud, hag e lavar dezi: keuneud)
 "Digasit din, mar plij, eur banne dour er pod a zo ganeoh, ma evin."
11. Ar vaouez a ya dioustu david dour (pe: da gerhad dour),
 hag Eliaz a hop war he lerh:
 "Digasit din ive, mar plij, eur begad bara en ho torn."
12. Hi a respont: "Buez d'an Aotrou, ho Toue!
 N'am eus tamm bara poaz ebed, ne jom ganin
 nemed eun dornadig bleud en eur pod, hag eun disterig eol en
 eul lestr.

Emaon o tastum daou damm keuneud, evid mond d'ar gêr
ha poaza an dra-ze evidon ha va mab;
hen debri a raim, ha goudeze mervel."

13. Eliaz a lavar dezi: "Bezit heb aon, it da ober evel ma lavarit,
med, da genta, poazit evidon, gand an tammig bleud-se,
eur baraig (pe: eur varaennig) da zigas din;
goudeze, c'hwi 'raio evidoh hag ho mab.
14. Rag evelhénn e komz an Aotrou, Doue Israel:
Podad bleud ne viannaio ket,
lestrad eol ne daio ket d'an hesk,
a-barz an deiz ma roio an Aotrou glao d'an douar."
15. Eet eo ar vaouez d'ober diouz lavarou Eliaz,
hag o deus bet da zebri, ar profed, hi hag he mab, epad hir amzer;
ar podad bleud n'eo ket eet bian,
al lestrad eol n'eo ket eet d'an hesk,
hervez komz an Aotrou lavaret dre ar profed Eliaz.

SALM 145 / 7, 8-9a, 9bc-10 - Diskan: Meulom oll heb paouez
..... Doue hag e vadelez.

7. An Aotrou Doue a zalh atao d'e hér,
a rent o gwir d'an dud gwasket,
a ro bara d'ar re o deus naon,
An Aotrou a zistag ar re 'zo chadennet.
8. An Aotrou 'ro sklerijenn d'an dud dall,
an Aotrou a laka sonn ar re bleget (pe: ar re groummet),
an Aotrou a gar an dud a vuez vad,
an Aotrou 'zo divennour an dud estren.
- 9a.

- 9bc Skoazella 'ra an emzivad hag an intañvez,
 ha kas a ra da netra menoziou an dud fall.
 10. Roue 'vo an Aotrou da viken,
 ho Toue-c'hwil, Sion, a rumm da rumm.

Eil Lennadenn. - Kendalhom gand ar gelennadurez diwarbenn
Jezuz Krist, beleg da viken, ha diwarbenn e zakrifis.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (9/24-28)

24. Antreet eo Jezuz, n'eo ket en eur zantual diwar dorn an den,
 skeudenn, ha netra kén, euz ar zantual gwirion,
 med e-barz an neñv eo eet,
 d'en em ziskouez evidom bremañ dirag fas Doue.
 25. N'eo ket kennebeud evid en em ginnig meur a wech,
 evel ma rank beleg meur al Lezenn goz antreal en templ beb bloaz
 da ginnig eur gwad ha n'eo ket e hini;
 26. rag neuze e-nije ranket gouzanv e basion
 liez gwech abaoe penn kenta ar bed;
 padal, bremañ eo, e termen ar hantvejou, eo deuet d'en em ziskouez
 evid distruja ar pehed dre e zakrifis.
 27. Ouspenn-ze, evel m'eo merket da beb den mervel eur wech hebken,
 - ha da houde emañ ar varn -
 28. evelse ive Or Zalver, goude beza en em ginniget eur wech
 evid dilemel pehejou an oll,
 a vo gwelet o tond eun eil gwech, n'eo ket mui ablamour d'ar pehed,
 med evid silvidigez ar re a vo ouz e hortoz.

SALUD D'AN AVIEL. - Alleluia!...

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (12/38-44, pe hebken 41-44)

38. En eur rei e gelennadurez d'ar bobl, Jezuz a lavare:

"Diwallit ouz ar skribed,

a blij dezo mond da vale gwisket gand saeou kaer, (pe: cheurh)

ha beza saludet war ar plasennou,

39. mond d'azeza war ar hadoriou kenta er zinagogou

ha kaoud ar renkou kenta er prejou;

40. Debri a reont madou an intañvezed,

ha pedennou hir a reont evid beza gwelet.

Seul rustoh a-ze e vo evito ar varnedigez!"

----- Amañ e kroger gand ar pennad diveæret -----
.....

41. Eur wech, pa oa azezet e kichen kef ar provou (e Templ Jeruzalem),

Jezuz a zelle penaoz e taole an dud peziou moneiz e-barz,

ha kalz re binvidig a daole kalz.

42. Dond a ra eun intañvez paour, hag a lak daou bezig.

43. Jezuz a halv e ziskibien d'e gaoud, hag a lavar dezo:

"E gwirionez, m'hen lavar deoh, an intañvez paour-mañ

he deus lakeet er hef muioh eged an oll dud all.

44. Ar re all o deus lakeet euz ar pezh o doa da zioueri,

med hi he deus kemeret war he dienez,

ha roet kement he doa, kement a jome ganti evid beva."

OREZONOU AN 32e SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez;
 pellait diouzom, ni ho ped, kement a vefe a-dreuz d'on hent,*
 evid ma vim distrob a gorv hag a spered
 hag e stad d'ober a galon vad ho polontez santel.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
 ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.

(Ar gempedenn-se a oa d'an 19ved sul goude ar Pantekost

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, taoler eur zell a vadelezh war ar provou-mañ:
 pa'z eom da ginnig ar zakrifis gand ar zonz euz Pasion ho Mab,
 grit ma kemerim perz ennañ gand oll nerz or halon.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA.-

Ho trugarekaad a reom, Aotrou Doue,
 bremañ p'om bet maget gand ho tonezon zantel;*
 ha setu e pedom c'hoaz ho madelez:
 war an dud a zo silet enno eun nerz nevez euz an neñv (dre ar gomunion),
 skuillit ho Spered santel, evid ma talhint da veva e stad a hras.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

33e SUL ORDINAL

Bloavez B (15 a viz Du 1970)

Lennadenn Ia. - A nebeudou e-neus Doue sklêreet e
gelennadurez d'an dud diwarbenn adsao ar re
varo da veo, en Testamant koz. Setu penaoz
e klevom ar helou-se gand eur profed.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED DANIEL (12/1-3)

Ar homzou-mañ am eus klevet, me, Daniel, a-berz an Aotrou Doue:

1. En amzer-se e savo Mikêl, an hini 'zo e penn an Elez,
dalhmad o veilla war bugale da bobl;
hag e teuiou eur mare leun a anken, evel ma n'eus bet biskoaz
abaoe ma'z eus poblou war an douar.
En amzer-se, e vo saveteet da bobl,
kement hini a vo kavet e ano skrivet war al levr a vuez.
2. A vagadou e tihuno ar re 'zo kousket e poultrenn an douar,
darn evid ar vuez peurbaduz,
darn all evid ar vez hag an dismegans da viken.
3. Ar re o do bet furnez a lugerno evel splannder an oabl,
hag ar re o do desket hent ar mad d'an dud all
a skedo evel ar stered da virviken.

SALM 15 / 5, 8, 9-10, 11 - Diskan: Warzu ennoh... (An Overenn, p.38)

5. C'hwi hebken, Aotrou Doue, a zo va lod ha va halirad,
etre ho taouarn emañ va flanedenn.
8. Va zellou a droan dalhmad warzu an Aotrou;
pegwir emañ em hichen, aon ebed da goueza.

9. Rag-se eo laouen va halon hag e trid va ene;
va horv ive a zo er peoh o tiskuiza.
10. Rag n'hellit ket lezel va buez da vond gand an Ankou,
na lezel an hini ho kar da ziskenn er bez.
11. C'hwi am hencho e gwenojennou ar vuez;
Levenez leun-barr a gavin dirag ho fas,
hag eürusted dudñuz en ho kichen da viken.

Eil Lennadenn.- Sakrifis Or Zalver a zo ken braz e dalvoude-
gež, ma n'eus hini all ebed war e lerh; diwarnañ eo
e teu deom, evid atao, buez nevez ha silvidigez.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (10/11-14, 18)

11. (Hervez al Lezenn goz) peb beleg a vez bemdez en e zav ouz an aoter,
oh ober e zervij hag o kinnig liez gwech ar memez sakrifisou,
~~reot~~ ha n'hellont morse dilemel ar pehejou.
12. Jezuz Krist, eñ, goude m'e-neus kinniget eur zakrifis evid ar pehejou,
hag unan hebken,
a zo eet d'azeza en tu deou da Zoue da viken,
13. o hortoz eno ma vo lakeet e enebourien da skabell dindan e dreid.
14. Gand eur brovadenn hebken euz e zakrifis,
e-neus echuet renta peurvad an dud a reseo santelez digantañ.
18. Pa'z eo roet ar pardon euz ar pehejou,
n'eus ket leh ken da ginnig sakrifis ebed evid ar pehed.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!
Grit ma vim prest 'benn ho tistro.- Alleluia!

- 18 -

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (13/24-32)

- En amzer-se, o komz euz e eil zonedigez, Jezuz a lavare d'e ziskibien:
24. "En deiziou-se, goude trubuillou spontuz,
an heol a deñvallaio, al loar ne roio mui he sklêrder,
25. ar stered a gouezo euz an oabl, hag an neñvou a vransello.
26. Neuze, e vo gwelet Mab an den o tond er houmoul, (pe: er goabrenn)
gand galloud ha gloar dispar.
27. Kas a raio neuze e êlez da zastum ar re dibabet gantañ
euz pevar horn ar bed,
euz penn pella an douar beteg penn pella an neñv.
28. Kemerit kentel diwar ar wezenn fïez:
pa vez deut tener ar skourrou anezi, ha digor an deliou,
c'hwi 'oar eo deut tost an hañv.
29. Evelse, c'hwi ive, a-benn m'ho po gwelet an traou-se o hoarvezoud,
gouezit emañ Mab an den deut da gichen, e-tal an nor.
30. E gwirionez, m'hen lavar deoh, ne vo ket tremenet ar rummad tud-mañ,
a-barz ma tiguezo an oll draou-se.
31. An neñv hag an douar a dremenno, va homzou-me ne dremenint ket.
32. Hogen, evid ar pezh a zell ouz an deiz pe an eur,
ne oar den ebed, nag an êlez en neñv, nag ar Mab zoken,
n'eus nemed an Tad hag a oar.

***** OREZONOU AN 33^e SUL

*Ar belec'h goude Komunia
a 3^e da glosk p. 20.*

KEMPEDENN.-- Grit deom, ni ho ped, Aotrou Doue, beza laouen bepred
ouz ho servicha a wir galon,*
pegwir n'eus na kaerroh na padusoh eürusted evidom
eged servicha dalhmad Krouer an oll vadou. Dre O.Z.J.K....

WAR AR PROVOU.-- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, selled ouz ar provou-mañ
kinniget d'ho kloar,* evid ma teuo deom, dre ar zakrifis santel,
ar hras da jom fidel deoh, ha da hounid an eürusted peurbaduz. Dre...

GOUEL AN AOTROU KRIST ROUE / Bloavez B (22. a viz Du 1970)

Lennadenn Ia..- Pell araog donedigez Or Zalver, e-neus Doue
roet da intent e felle dezañ unani peb tra, ha dreist-
oll gouenn an dud, dindan rouantelez Mab an den.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED DANIEL (7/13-14)

13. Edon o selled e-kreiz gweledigeziou an noz,
ha setu o tond war goabrenn an neñv unan heñvel ouz eur mab-den.
Erruoud a ra beteg ar hiziad, hag e zigas a reer dirazañ.
14. Dezañ eo bet roet galloud, gloar ha rouantelez,
hag an oll boblou, broadou ha yézou d'e zervicha.
E halloud a zo galloud peurbaduz, ha ne dremenno ket,
hag e rouantelez 'zo unan ha ne vo ket diskaret.

SALM 92 / 1ab, 1c-2, 5.- An diskan a hell beza (war don ar Meuleudiou):

An Aotrou Krist a zo Roue:* dezañ rouantelez ar bed nevez!

1. An Aotrou Doue 'zo roue: splannder eo e wiskamant;
splannder skeduz e-neus kemeret da vantell,
ha nerz e-neus laketa en-dro d'e zargreiz.
- 1c Eñ e-neus startet diazezo an douar, ha ne vrallo ket;
2. Ho tron-c'hwi, abaoe neuze, a zo divrall,
ha c'hwi 'zo beo a oll-viskoaz.
5. Ho komzo-c'hwi a heller fizioud warno;
ho ti a zere ar zantelez d'e gaerriad, Aotrou, a-hed an amzerioù.

Eil Lennadenn.- Gand an abostol sant Yann, sellom ouz
ar Zälvér beo da viken, a zigor deom e rouantelez.

PENNAD EUZ LEVR DISKULIADUR AN ABOSTOL SANT YANN (1/5-8)

5. Gras ha peoh warnoh, a-berz Jezuz Krist, an test gwirion,
ar henta ganet a-douez ar re varo,
ha mestr war rouaned an douar.
6. Dezañ, leun a garantez evidom,
eñ hag e-neus or gwalhet euz or pehejou gand e wad e-unan,
hag e-neus grêt ahanom eur rouantelez ha beleien da Zoue e Dad,
ra vo gloar ha galloud da virviken. Amen!
7. Emañ o tond e-kreiz ar goabrenn, hag an oll dud a welo anezañ,
ar re zokén o deus toullet e gorv;
hag ouz e weled, oll boblou an douar
a skoio gand doan war o feultrin. Ya! Amen!
8. Alpha hag Omega ez on, penn kenta ha diweza, eme an Aotrou Doue,
an hini a zo, a zo bet hag a zo da zond, an Oll-Halloudeg.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia! Meuleudi deoh, Aotrou Krist!
Gwir Roue warnom ha war ar bed. Alleluia

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (18/33-37)

- Pa 'z eo bet digaset Jezuz dirag Pilat,
33. hemañ a houlenn outañ: "Ha bez' ez out-te roue ar Juzevien?"
 34. Respont a ra Jezuz: "Hag ahanoh hoh-unan e lavarit kement-se,
pe re all o deus hen lavaret deoh diwar va fenn?"

120
GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Resevet ganeom magadur ar vuez peurbaduz,
ni ho ped gand fizians, Aotrou Doue:*
ni hag a zo eun enor evidom senti da lezenn an Aotrou Krist,
Roue ar bed a-bez,
ra vim gantañ e rouantelez ar baradoz
beo hag eüruz da viken.
Drezañ, Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

=====

A d d e n d a : e traoñ ar bajenn 16, evid an 33e Sul :
.....

GOUDE KOMUNIA.- Resevet on eus, Aotrou Doue, sakramant an aoter,
ha bremañ ho pedom a greiz kalon:*
ar pez on eus grêt en overenn gand ar zonj euz ho Mab,
evel m'e-noa lavaret henn ober,
ra dalvezo da lakaad or harantez da greski.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

